

Distro an Neve-amzer

(Yez Kerne-Izel).

52

Ar goanv gant e frim 'zo aet kwit adarre,
Ha pep tra zo laouen en draouien, er mene.
Elec'h an avel yen a skorne an douar.
Brema ne zanter mui 'met eun ezen glouar.

N'eus ket pell, e welemp ar steriou dic'hlaniet ;
Gant an doureier bras ar prajou oa beuet ;
Brema, o pebeuz kem ! Na koant eo ar prajou,
O tispak a bep tu ar c'haera bokedou !

An heol 'zave diwêl dâ roi d'omp sklerijen,
Ha 'lies ne bare 'met a-dreus eur vrumen ;
Brema e sav abred, ha brema, gant dudi,
Her gwelomp mintin mad en oabl o lugerni.

Kentoc'h ne glevemp mui, siouaz ! dre ar c'hoajou,
Mouez dous al laboused o kana o zoniou,
Brema 'vad e kanont, epad m'emaint o choaz
Eul lec'h d'ober o neiz, e-touez ar bodou glaz.

Doue, krouer pep tra, mestr leun a vadelez,
C'houi laka en-dro d'in bue, kê, levenez,
Gret ive d'am ene beva, kana, tridal,
Da c'hortos bue, kê, levenez ar bed-all.

Eur Misioner breizad.